



## Kasino

Krouet gant Sonia Orriger

### Mont en dro ar veilhadeg :

Lakaat ar vugale o deus c'hoant, e karg eus ur stal :

#### Ruilhenn :

Ret eo klaoustreañ war niverennoù ar bladenn c'hoari da Heul.  
(prenet e vez ruilhenoù e giz-se en holl stalioù vras.)

#### Redadeg marc'h

C'hoariet e vez 6 den an eil a-enep egile  
Graet e vez ur klaoustre war ur marc'h rezis (Ret eo en em  
klevout war an niver a dikidi klaoustreet evit ar bartienn mañ partienn).

Bep gwech e vez graet un 1 gant an diñs, e vez ar marc'h unan  
ez a war raok d'ur garrezenn,  
Mard e vez graet 2, eo an eil marc'h hag all, hag all...

An hini n'eus graet ar klaoustre war ar marc'h a zo da  
gentañ e fin, E vo gounezet gantañ an holl dikidi klaoustreet  
gant ar re all...

#### Boneto

Adkavout ur gartenn etre an tri mesket

#### 4 / 21

Pal ar c'hoari eo ober ur 4 un 2, hag un 1 gant an diñsoù,  
3 diñs a zo, 3 zro a zo,

Skouerenn : Ma kouezh war un 1 ur 4 hag ur 5 ret eo bannañ  
nemet ar 5

#### Black jack

Roet e vez 2 gartenn e penn-kentañ ar c'hoari .... Gallout a ra  
ar c'hoarier kemer kemen a gartenn a blij dezhañ. al ar c'hoari, kaout  
muioc'h a boentoù eget ar bank, hep kaout muioc'h eget 21... Muioc'h eget  
21 a dalv kollet ar bartienn...

#### Benveg arc'hant

E barzh 3 sac'h bihan, lakaat al legumaj da heul, Klaoustreañ  
an niver a dikidi n'eus c'hoant ar bugel, ha goude, heuliañ  
follenn da heul, evit gouzout ped gwech n'eus gounezet  
e glaoustre.



1	2	3	1añ douseennad	1>18
4	5	6		Par
7	8	9		
10	11	12	Eil douseennad	Ruz
13	14	15		Du
16	17	18		
19	20	21	Trede douseennad	Ampar
22	23	24		19>36
25	26	27		
28	29	30		
31	32	33		
34	35	36		
Kolonenn 1	Kolonenn 2	Kolonenn 3		

# Kasino

Reolenn ar ruilhenn

<b>1 niverenn</b>	<b>Klaoustre x 6</b>
<b>2 niverenn</b>	<b>Klaoustre x 5</b>
<b>4 niverenn</b>	<b>Klaoustre x 4</b>
<b>6 niverenn</b>	<b>Klaoustre x 3</b>
<b>Kolonenn (12 niverenn )</b>	<b>Klaoustre x 2</b>
<b>Dousennad</b>	<b>Klaoustre x 2</b>
<b>18 niverenn (1&gt;18) (19&gt;36)</b>	<b>Klaoustre x 1</b>
<b>Par/Ampar (18 niverenn)</b>	<b>Klaoustre x 1</b>
<b>Du/ruz (18 niverenn)</b>	<b>Klaoustre x 1</b>











Klaoustre X1



klaoustre X 2



Klaoustre X 5